

Diskanj. { Ganet zo eur bugel Doue ;
Bombard ha biniou sonet ;
Ganet zo eur bugel Doue ;
Dre-holl ar burzud-ze meulet !

Aboue tremen pewar mil vla
Diout-an 'komze ar brofeted,
Aboue tremen pewar mil vla
Gand an holl e oa gortoet.

Na koant eo ar bugel-ze !
Ken koant-all hini na c'hanaz ;
Na koant eo ar bugel-ze !
Den koantoc'h 'vit-an na welaz.

Eun tamm plouz e oa e wele,
Ar bevien 'deuz kaeroc'h tier ;
Eun tamm plouz e oa e wele,
'Vid Doue pebez izelder !

'Vit pean 'vid hon gadelez (1)
Hon lorc'h hag hon avarizded,
'Vit pean 'vid hon gadelez
Er stad-man eo diskennet.

Jezuz, holl-c'hallouduz roue,
Bugel bihan 'vel m'ho kwelan,
Jezuz holl-c'hallouduz roue,
Renet war-n-omp holl er bed-man !

F. G. (Goulloiric)

(1) Leustoni. huc diroll.

(Roaz ar Vietoned - 24^{de} 1898.)